

FIN DES TRAVAUX DE RÉSEAUX, DÉBUT DU CHANTIER DE LA GARE

Les travaux du Pôle d'échanges multimodal (PEM) ont essentiellement concerné jusqu'ici les réseaux souterrains (eau, gaz, électricité, fibre) des rues adjacentes à la gare. **Ils s'interrompront, pour la trêve de Noël, entre le 17 décembre et le 3 janvier. Ainsi, pendant les vacances scolaires, la circulation sera rétablie afin de faciliter les déplacements et l'accès aux commerces (voir schéma ci-dessous).** Les travaux reprendront début janvier pour une durée d'un mois et s'achèveront avec le comblement des tranchées.

Dans le même temps, le chantier du futur pôle d'échanges multimodal (PEM) s'engage véritablement. Il a débuté, fin octobre, par l'installation de la base vie, c'est-à-dire l'ensemble des modules temporaires qui abriteront les entreprises et les ouvriers durant le chantier. Il a fallu pour cela démolir un ancien quai de gare (voir photo) et une partie du mur de pierres longeant l'avenue de la Libération.


La base vie est un préalable aux travaux d'aménagement qui débutent en janvier par la réalisation du parking longue durée, du giratoire d'accès à la future gare routière et de

la passerelle qui enjambra les quais et les voies ferrées. Cet ouvrage essentiel à la desserte des quais et à la connexion avec l'impasse de l'Odét nécessitera 18 mois de travaux et devrait être livré à l'été 2023.

En raison des travaux, la fresque artistique Gare-Parc, initialement installée sur le quai A de la gare, sera prochainement déplacée à proximité de la base vie.



Les travaux de réalisation de la base vie du chantier de pôle d'échanges



PLUS D'INFOS SUR LA PAGE FACEBOOK GARE PARC, LE SITE LE SITE QBO.BZH
ET À L'EMBARCADÈRE, LA MAISON DU PROJET GARE-PARC, LES LUNDIS ET MERCREDIS DE 9H À 12H30 & 13H30 À 17H30.
INSCRIVEZ-VOUS ÉGALEMENT À LA NEWSLETTER GARE-PARC À L'ADRESSE GAREPARC@QUIMPER.BZH

DIBENN AL LABOURIOÙ WAR AR ROUEDADOÙ, DEROÙ CHANTER AN TI-GAR

Betek-henn ez eus bet dreist-holl labourioù war ar rouedadoù danzouar (dour, gaz, tredan, gwienn optikel) er straedoù a zo tro-dro d'an ti-gar. **Ehanet e vint eus ar 17 a viz Kerzu d'an 3 a viz Genver. E-giz-se e vo adlakaet en e reizh an tremenerezh hag aesaet mont tre er staloù e-pad vakañsoù Nedeleg (brastres dindan).** E penn-kentañ miz Genver ec'h adkrogo al labourioù e-pad ur miz ha peurechuet e vint gant peurgargañ ar c'hlaioù.

War un dro e krogo da vat chanter ar PEL (Pol eskemmoù liesvodel) war dakad an ti-gar. E fin miz Here eo bet staliet an dachenn vuhez, da lâret eo an holl lochoù berrbad e-lec'h ma vo goudoret an embregerezhioù hag ar vicherourien e-pad al labourioù. Ret e oa bet dismantrañ ur c'hae kozh eus ar porzh-houarn (skeudenn) hag ul lodenn eus ar voger vein a zo a-hed da vali an Dieubidigezh.


Ur prantad kentañ eo staliadur an dachenn vuhez evit ma c'hall kregiñ al labourioù terkañ e miz Genver. Savet e vo ar parklec'h hirbad, ar c'hroashent-tro evit mont d'ar porzh-hent da zont hag an treuzell az aio dreist d'ar c'haeoù ha d'an hentoù-houarn. 18 miz labour a vo ret evit sevel an

oberiadur-mañ a vo hollbouezus evit deservij ar c'haeoù hag al liamm gant hent-dall an Oded. Echuet e vo a-benn an hañv 2023.

Abalamour d'al labourioù e vo dilec'hiet ar freskenn arzel Gar-Liorzh staliet betek-henn war gae A an ti-gar. Staliet e vo e-tal d'an dachenn vuhez.



Labourioù sevel tachenn vuhez chanter ar PEL.



MUIOC'H A DITOUROÙ WAR AR BAJENN FACEBOOK GAR LIORZH, AL LEC'HIENN, LEC'HIENN QBO.BZH
HAG ER C'HAEL-LESTRAÑ, TI AR RAKTRES GAR-LIORZH D'AL LUN HA D'AR MERC'HER EUS 9E DA 12E30 DIOUZ AR MINTIN
& EUS 1E30 DA 5E30 GOUDE MERENN.
LAKAÏT HOC'H ANV IVEZ EVIT AL LIZHER-KELAOÏN GAR-LIORZH O SKRIVAÑ DA GAREPARC@QUIMPER.BZH